

156

En tre' Plouider à triélez

(f. 229)

En tre ploueder a tre lez
Me a meus choazet eur vestres

ia ar vraoa en eur ger
Deus ar verc'het ploueder.

Me zo eur minor iaouank a zo den a peb affer
a mar kerit va mestres me vezo ho cherricker

allas non ket kapabl evid ober o cherrich
mes oui kavo eun all a vezo deus ho tivis

— me zo eur minors iaouank a zo mewbet disouten
mez oui kavo eun all hag a devezo moëien.

Neken (1) moëien a klaskan o kalite va mestres
D'allout beva en ho c'hrass keit a ma vin he bue.

especial en amzer man sinsibl o timizjou
Balamour dar potret iaouank zo karget a vissou.

O[ti]spen ma c'heont dan ebad da zispign ho madou
Gant ar gwin a gant an danss ag gant ar c'hoari kartou.

Me a promet dec'h va mestres eur voech ma vezin demezet
biken queren na karten em daouern na ves goëlet.

Setu an daou man consolet hag hi o taou demezet

E ben tri de goude se adare ben a neve
E voa en hostaliri gwin a kartou adare.

(f. 230)

(1).— Le ms. a : Neken ; lire : Neket.

157

Setu ar plac'h man dar ger ag hi meurbet disolet
 Allas me zo bet tromplet he kredi komzou ar goasset .

Gwech all me meus bet amzer em boa eur galon ie
 Ken en ker a var ar mes ag en kement assemble

Pa errouen en Kornik an dans
 me a vije respectet evel unan deus an noblanss

ia eur visach laouen ag eur lagadik parfait
 Kement a c'homze ouzin a fote din da garet .

Breman zo eur amzer all a zo kontreul dezji
 Kement na chouers (1) ouzin nallan karet hini .

Gwech all me meus bet amzer a zouge teir goallen
 eunan rus eunallik c'hlas ag eunallik velen

Pa laken va hini rus me voa eur fouldrilizen
 Ken en ker a var ar mes a kement a va varchen

Pa laken va hini c'hlas me a voa victorianes
 en galon va chervicher evel eur rouanes
 va ini velen a laken var va bis avéhou
 a pa sellen outi a tenen huamadou
 o chonjal em iaouankis deus om amser dissourei
 malheur dan hini c'huita pa na zalc'h mad dezji .

—
 7

Jannet Ruill 19 janv : 1851 .

(1) . - C'est ainsi que j'ai lu le mot dans le ms . .